

Ar Briedelez

TON : Evit beva gant-levenez


PE : O Gwerchez Vari va mam ger

1

Dirag Jesus Salver ar bed,
An Iliz santel e bried,
Ha prometi 'rit, priegoù,
Miret bepred o lezennoù ?
Ia, ni a bromet kemeret
An eil egile da bried,
Hag heulia bepred lezennoù
Aviel Jesus hon Otron.

2

Unanet oc'h dirag Doue
Dre lezen ar gwir garante
Zo dleet eire priegoù
Hervez komz Jesus hon Otron :
Priegoù oc'h eta 'vit mad,
Unanet en hano an Tad,
Ar Mab hag ar Spered-Santel;
Setu lezen an Aviel.



Ar sakramant-man a zo bras,
Eienen a nerz hag a c'hras
D'ar goaz da garet e bried,
Dezhi d'e zouja, d'e garet ;
Rag ar briedelez kristen,
Hervez sant Pol, zo eur skeuden
Euz ar garantez peurbadus
Zo 'tre an Iiz ha Jesus.

Evel gwechall el lezen gos,
Doue bepred 'ro' vennoz
D'ar merc'hed 'zo evel Sara,
Evel Rachel ha Rebecca,
Fidel, fur ha karantezus,
Skouerion a feiz hag a vertuz,
A zav ervad o bugale
Hag a heul lezennou Doue.

Ha c'hwi, goazed 'zo da viken
Unanet d'eur vaouez kristen,
Diwallit ouz pep tra direiz,
Dalc'hit d'ar furnez ha d'ar feiz,
Mirit bepred lezen Doue
Ha pourveit dezhan ele :
Gant gras Doue hag e' vennoz,
'Velse 'kerzfot d'ar baradoz.

Gwerchez Vari, Mamm da Zoue
A zo ker braz ho karante,
Dirazoc'h hoe'h euz daou vugel
'N em laka dindan ho skoazel ;
Grit m'o devezo hirr vuez
Bennoz Doue var o'lignez,
Ma kavint ar gwir eurusted
E' karantez Doue bepred !

Dorn unan en dorn egile
E velit 'man ho bugale ;
Krogit en eil dorn, o Gwerchez,
C'hwi a zo leun a vadelez :
Harpet varnhoc'h ha var Jesus,
O buez a vezo eurus ,
Ha gant Jesus, en ho kerc'hen,
E vezint eurus da viken.

J.-Y. G.

Imprimatur,

Quimper, le 26 Janvier 1922.

P. MESSENGER, V.-G.